

ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGOL

Savet gant ar roue Gralon

GOUDE MA OA BEUZET KÆR IS

'Nep a bed Guerc'hes Remengol

Birviquen ne dai da gol

En escopti Kerne, el lec'h emabrema môr Douarnenez, e oa guechal eur gaer vras meur-bet, hanvet Is.

Eur voguer ledant hag huel gant seljou ouarn he difenne deus ar môr, Er gær-ze ne velet, e touez an dud pinvidic, nemet dizurs, goal exempl ha fallagriez. Gralon, pehini a chome neuze en Is, a voa roue Breiz-Izel. Ret e oa brezeller en e yaouanquis, a rust en andret e zujodi; mæs en e gosni, sclerigenet dre ar feiz kristen, e teuas drouzet ar roue Gralon, abalamour d'an droug-oberou, d'an torfejou ha d'an injustiçou a re bemde, e pales e verc'h yaouanq; mæs goab a red anezou, hac ar Roue simpleet dre an oad. n'en doa mui a c'halloud avoalc'h evit areti dizurzou ar gær vras.

Doue a skuisas er fin, o velet Is caledet en he fec'hejou, hac a roas da anaout da Ael Breiz-Izel, e vignon Guenole, penaos eb dale pell, ar gær gaër-ze a vije beuzet gant ar môr Kerkent. Guenole a bignas var e varc'h, ag a redas da gær a Is. e sonjal c'hoas dizarmi koler Doue. Mæs tremenet e oa an amzer a druez. Pa en em gavas an abad zantel, var dro anter-nos, selujou Is a voa digor, hac ar môr a c'hroze spontus o ti-ruilla var an dud, an tier ag ar palejou. Guenole ne allas sovetis nemet Gralon ep quen; guelet a rer c'hoas roudou treid e varc'h er garrek, var pehini, aboue, abadet Landevennec. arog komer ho c'harg. a deu da ober o feden ha da hanaout ar roue Gralon evit fondatur ho c'houent.

Ker Is ne ma mui, evel Sodom, Gomor ha Babylone; hac herie ar mor a rail dreist he fenn.



AN ITRON VARIA REMENGOL

da veza douc evel eur oan. Hirvoudi a re alies var dizursou Is, ha var ar vuez dirollet a rene e verc'h, ar brinces Athès, gant an noblans yaouanq a gær ha deus ar vro hanvet herie, Kær-Athès, pehini a voa dezi a leve.

En amzer-ze, e oa en Breiz-Izel, daou abostol zantel, daou vignon da Zoue, sant Kaourantin, kenta escop a Guemper, ha sant Guenole (1), kenta abad a Landevennec; alies o devoa prezeguet ar feiz er gær a Is, ha gour-

(1) *Guen-oll-e, Oll-e-Guen* (il est tout blanc). hanvet evel-ze gant he vam ar santes Ven, abalamour ma oa eur buguel koant ha fur. Sant Guenole, dre e vertuziou, en deus meritet an koant kaër a Ael Breiz-Izel (l'Ange de la Bretagne).

Da zao-heol, Gralon o vesa pignet gant Guenole var lein Mene-Hom, a dolas ac'hane eur zel truezuz var e lec'h, mæs el lec'h ma edo ar gær gaër a ls ne velas mui nemet môr Douarnenez, hac e kouezas d'an daoulin evit trugarecad Doue hac ar Werc'hes da veza zoveteet e vuez

Pa zavas divar e zaoulin, e velas dindan an heol o luguerni *Ru-men-goulou*, pe *Men-ru-ar-goulou*, var pihini vije sacrificiet tud beo, ha bep mis eur buguel bian c'hoas eus a vronn Neuze beuzet en e zaelou hep e zaoulagad savet etrezek en Ev e lavaras d'he mignon zantal :

« Var ar Men-ru zo consacret da eun doue barbar, me a reïe sevel « eun ilis gaër d'ar Werc'hes, hac e lec'h ma skuiller ar goad da Teutatès « e skuillo Mam ar guir Doue he graçou var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad de bressesse, ha beleien ar Bayanet, o veza em revoltet pa veljont dispen templ an doue faos Teutatès, ar Roue christen ho zrehas e kever Argol, e pen a Vretonned convertisset.

Goude bean gret e beden var Mene-Hom, a roue Gralon a heuillas Guenole da abatty Landevennec, savet gantan eun neubet a blaveziou kentoc'h, Diarog kement ze en devoa c'hoas roet he balès, en Kemper. da zant Kaour-entin, pehini e doa toret e naon dezan ha d'e compagnonez gant eun tam deus he besk bian. E plaç ar pales-ze, ema brema ilis kaër cathedral Kemper.

Gralon e dremenas e Landevennec a rest deus he vuez en eur binigen kalet, hac alies a ze gant e vignon kaër da Remengol da bedi evit he bobl an *Itron-Varia Remed-oll*. Beza en devoa an heur d'e guelel, brudet bars e pevar c'horn Breiz-Izel, hac o vervel entre divrec'h zant Guenole, e Landevennec, a recommande he hine da Zoue en eur lavaret gant fiçians :

« Itron Varia Remengol,

« Miret ouzin na zin da goll,

« Pedit ive o Mab Jesus,

« Mar vezin gantan evurus. »

C'houezec cants vlas a zo aboue ma e maro Gralon, hac ar Vretonned, pere zo bepred tud a feiz hac a galon, ho deus c'hoas sonj eus ha Roue coz, hac e vignon zant Guenole. Mæs na c'hanevefent guelloc'h histor ho pro kaër, pa zeont da zul an Drindet da bardon bras Remengol a de velout môr Douarnenez, Meue-Hom, Landevennec ha tour huel ilis miraculus an *Itron-Varia Remed-oll* e lavarent, an daëlon en ho daoulagad, en eur vale gant respect var douar ar Sænt hac ar Rouane :

« Bras ar burzudo a ro bel,

« Ebars an amzer tremenet ! »

Bras ive ar lurbudou a ra c'hoas herie an Itron Varia Remengol en andred an oll Vretonned, hac ispcial en andred ar belerinet a deu bemde d'ne guelel, alies eus a bell bro, cals anezo dierc'hen hac e corf o rochedou.

Ar vinoret dilezel, an intanvez paour, ar beorien noas, soudardet Breiz-Izel en creis tan ar brezel, ar vartolodet var ar môr bras en furol, an oll dud affliged a gorf, a galon hag a speret, deu en o foannlou, darn en dangeriou, darn all en disesper, hag oll var guelel ar maro ho deus sonj eus ho Mam douç ha mad, alies e leveront dezi gant karante ha gant fiçians en he galloud hac en e madelez :

« Guerc'hes sacr a Remengol, patronez Breiz-Izel,

« Pedit evidomp, herie ha pa renkin mervel ;

« Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet,

« Ho deus ho karet, ho kar, hac ho karo bepret. »

KANTIK-SPIRITUEL

EN ENOR

D'AN ITRON VARIA REMENGOL (1)

PATRONEZ BREIZ-IZEL

Kurunet dre urz hac en hano en Tad santel ar PAB PI NAO, an 30 a vis mae 1858 gant an aotrou RENAN NICOLAS SERGENT, Escop Kemper ha Leon, dirag eun nivern bras a veleien hac ouspen kant mil den, deul en devez-ze, a bep bro, da Remengol (2).

Itron Varia Remed-oll,
Miret ouzimb ne c'haïmp da goll.

Guerc'hes sacr a Remengol, patronez a Breiz-Izel,
Pedet evidomp, hirie, a pa renkin mervel.

Var an ton : *Glac'har ar Werc'hez*

Tad, Mab, ha Speret Santel, tri ferson an Drindet,
Me o ped, a wir galon, da raï din a speret,
Da composi eur c'hantik da stereden vaillant
Ar fourdelizen gaëra, demeus ar firmamant.

Ho Merc'h eo, Tad Eternel, a Werc'hes biniguet,
Pried ar Speret Santel Rouanez an Æle,
Dreist an oll groaguez devot, hi zo bet cavet din,
Da veza mam da Jesus hon Redemptor divin,

Pa zeuan da niveri, Guerc'hes sacr a santel,
An enor, ar meulodi hoc'h eus e Breiz Izel,

(1) Remengol, hanvet guechal, *Ru-men-goulou*, da lavaret e *Men-ru-ar-Goulou*, a balamour ma oa eno eur men ru, pe eun templ consacret da c'houlou De, enoret evel eun Doue dindan an hano a Teutatès (Doue Tud) ar roue Galon, goude beza diskaret an templ-ze a zavas en e blaç eun ilis kaër da Mam a guir Doue, a chanchas hano payen *Ru-men-goulou* en hano christen a *Remengol* a lavaret e *Remed-oll*, deus a behini ar Batrones a zo hanvet an *Itron Varia Remed-oll*, (*Notre-Dame de Tout Remède*) abalamour da burzudou bras a ra bemdez eno, a Werc'hes ; aboue amzer ar roue Galon betec hirie.

Remengol a zo bet, a viscoas ar gaera, ar santela iliz a Vreiz-Izel ; herves an dud koz, peb guir Vreton a gle, eur veach da viana, beo pe varo, ober pelerinach Remengol.

(2) Kurunen an Itron Varia Remengol, ar gaera zo bet guelet biskoas en Breiz-Izel, a zo en aour hag e peries.

Va speret a zo dister evit ho discleria,
Nemed doc'h hu a zeufe, hirie d'am azista.

Mæs ennoc'h leun a fianç em euz antreprenet
Publia ho calloud vras touez ar Vretouned,
Ha disclera ar graçou accordet da bed-oll,
Dre c'hraç Jesus hom Autrou, en Ilis Redemptor.

E ped lec'h meo enoret, Mari hon mam santel,
Alies ve si aout neb zo dezi fidel,
Mes beza e deus eur plaç bras en pini bemdes,
E scuill var ar Vretonet tensor ho madeles.

Er plaç-ze, e Breiz-Izel, meurbet darempredet,
En escopti a Guerne, er barouz a Hanvec,
Eus eun ilis consacret d'e c'hloar ha de enor,
Rouanez an oll Æle, guir vam hon Remengol.

Guir dud devot d'ar Werc'hez, m'ho ped diredit oll,
Dent gant laouenediguez da ilis Remengol,
Evit pedit mam Doue da rei deoc'h ar yec'het,
Ha da sivoal hoc'h ene dious taç an droug speret.

M'an d'e poanio oc'h ene gand gouliou ar pec'het
Deut d'ar sourcen ar vuez, hag o pezo remed ;
Goulennet oc'h mam Jesus graçou celestiel,
Ma c'hellet chanç a vuez, beza dezi fidel.

Ma de ho corf forbuet gant an infirmite,
Deut da ilis Remengol gant eur guir garante,
Er plaç leun a viraclou dre c'hras ar Werc'hes sacr,
Pini en oc'h oli boanniou ho soulajou timat.

A bêvar c'horn Breiz-Izel e teu pelerinet
Da bidi Mam hom Zalver gant eur galon parfet ;
Eus an eskopti Leon, Treguer Guened, Kerne,
E teu an oll tud devot da veuli Mam Doue.

Dre ar brut eus ar miraclou a ra e Remengol,
Dre graç Jesus hon Autrou, e deus ar galloud oll,
Mar teu ar belerinet bemdes epad ar bloas,
D'oçer an dro d'he ilis var ben ho daoulin noas,

Un nombr bras a viraclou a ra ar Werc'hes sacr,
Ebars ilis Remengol dre c'hras Jesus e Mab ;
Dre he sicour galoudus em euz antreprenet
Discleria lot anezo e touez ar Vretouned.

Ar Werc'hes a Remengol, er bares a Hanvec,
E devez gret a nevez eur miracl kaër meurbet,
An oll a zo estonet oc'h he consideri :
N'en deus netra impossubl dec'hu, Guerc'hes Vari.

A dost dezi eur buguel c'hoas en eun oat distér,
Pa voa ar vilin o vala, a geuzas er rivier ;
Gant an dour e voa ruillet, ma c'has en toul ar bal,
Ma sonjer e voa flastret, allas ! gant an dour mal.

E dud gant cals nec'hamant, ha melconiet oll,
Er goestlas, a voues huel, da Werc'hes Remengol ;
Mari leun a garantez, dre e deorn biniguet,
A zionelas e vue, er meas e voe tenet.

Evit rei guir desteni deuz ar mi'acl kaër-ze,
Ar buguel da Remengol a voa kasset neuze,
Laket er procession gantan eur c'houlouen,
Evit publia gallout a Werc'hes souveren.

A dost d'ar C hastel Nevez, herve ma eo prouvet,
He deuz grêt guir Vam Douc eur miracl gaër meurbet,
Dre an tan eun tieguez a c'he da berissa,
P'o deuz pedet a Werc'hes d'a zont d'he assista.

An ozac'h, guir servijer d'ar Werc'hes biniguet,
En em strinquas d'an daoulin de bedi gant respect,
Mari leun a garantez a zigaças glao bras,
Hac, hep ober droug da zen, an tan goal a vougas.

Chom a ran c'hoas sebezet Guerc'hes, Mam a drue,
O compren ho karantez evit ho bugale ;
En diskruezet o c'heus bet d'eur c'hrouadur daou vloa,
O c'hober en e andret eur miracl a kaëra.

Dre eur tourmant a brassa eur c'hoz ty o couéza,
Eur c'hrouadur o tremen en em gav dindanna ;
Ar vein vras en dro dean, ma sonjer voa lazet,
C'hui epquen en zicouras, Rouanez an Aële,

E dud a lavare dec'h Guerc'hes a *Remed-oll* :
Sicouret hor c'hrouadur, pe he c'hao da goll !
Ar vein vras zo remuet, ha dre graç ar Werc'hes,
Ar buguellic a c'hoarze dindan, leun a vuez.

Mari, hor mam souveren, var vôr ha var zouar,
A den, e zervicherien dious anquen a glac'har,

Nombr bras a vartolodet e deus bet preservet,
Prestic da goll o buez, p'ho deus hi he fedet.

Nombr bras ar vatimanchou e devez preservet,
Hac an dud hac a madou, dre he c'hraç biniguët ;
Ha bagou, ha goberi creis an tourmant bras,
Pa bedent hor mam Mari, a obtene e c'hraç.

C'hoas eur c'hrouadur yaouanq a escopti Leon,
A voa kounset er rivier, Doue pebeuz eston !
Klasquet gant cals a glac'har, a pa o deus pedet,
Ar Werc'hes a Remengol, en instan eo kavet.

Pa gavchont o c'hrouadur, hag en prest da vervel,
Ec'h implorjont, a nevez Mari hom Mam santel,
Da rei dezhan ar vue he c'hras biniguët,
Dirac ar compagnonez, ho feden zo klevet.

Eun den a c'houlén Leon a gollas ar c'herzet,
Zo bet eiz mis o vale voar bouez diou vas loac,
Grêt pris gant ar medecin evit troc'ha he c'har,
He zroc'ha e c'hlin, Doue pebeuz glac'har.

Eun nosvez en e vele e teuas sonj deza,
E voa bet en Remengol guechal o pardonna.
Hac e zant en e c'halon eur garantez ardant.
Hac eur guir devotion d'ar Werc'hes oll buissant.

Guir vam Jesus, hon Aotro eme an affliget,
Va zicouret em poaniou Rouanez an Aêl,
A me raï en donezon kaëra tra zo hem zi,
Da gass da zeiz ho pardon evit ho henori.

Mari, leun a garantez, a bedas e Mab ker,
Da exauci a beden ar re he servicher,
Recev a ras ar c'herzet dre graç guir *Remed-oll* ;
A ed eo oh he meul en ilis Remengol.

Tregont den en eur vaguic a bares Plougastel.
A gonfontas e rad Brest, gant eur barat avel,
Oll e pedjont a galon patrones Remengol,
Eur batimant e deuas, sovetet in bet oll.

Er gaer a Vontroulez e krogas an tan goal,
Ar flamou tan, tro var dro o velet o nijal,
Eur barner yaouanq ractal, dar Werc'hes a bromet,
Mont da ilis Remengol, hac a tan zo meguët.

Evit gonit ar victo⁴, soudardet Breiz-Izel,
A bed Mari gant fisianç e kreis tan ar brezel,
Hac ar victor gounezet, e zeont a vandennou,
Da Remengol diarhen, e korf ho rochedou.

Martolodet an Arvor, ruillet a diruillet,
Var ar mor bras e furol, prest da veza kollet,
Eb eor, ep stur, ep sicour, oll e renkont mervel,
Pa deu d'ho savetat patronez Breiz-Izel !

Ne ouffe quet neveri na dont da henvel oll,
Ar miraclou infini a ra guir *Remed* oll :
Evit nep zo guir gristen a leun a galon vad,
Hi zo guir avocades dirac Jesus he mab.

Ken a gorf, ken a ene, kemen-zo afliget,
Deut da illis Remengol gant eur galon parfet,
Pedit eno gant fisianç hor mam santel Mari,
Ha renoncet d'ar pec'het evit plijout dezi.

Sant Thomas ha sant Bernard, tud guizec ha santel
A da Vari mam Jesus, dao servicher fidel,
Hon assur a bers Doue biken na zai da goll,
A nep a gar ar Werc'hez, patrones Remengol.

Demp eta da enori brema, da Remengol,
Relegou sacr ar Werc hes, an daouzec abostol,
Ha relegou Sant-Joseph ha guir groas hor Salver,
Maro, vit al liberte, var leia ar mene Calver.

Relegou sant Guenole, mignon bras da Zoue,
Relegou sant Caourantin kenta eskop kerne,
Ha kalz relegou all gant ar pap digasset,
E presant da Remengol evit ar Vretonnet.

Kourach, kourac'h, Bretonnet ha gant fisians deut oll,
Da velet ho patronez en ilis Remengol,
En en roet a vrema da zervicha Doue,
Ha da pedi ar Werc'hes ar rest eus ho pue.

Kement ez eo enoret ha karet gant Doue,
Ma permel ganti ober hervez he bolante ;
An niver bras ar c'hraçou a skuil demp var ar bed,
A dremen oll dre zaouarn ar Werc'hes biniguet.

Ar bemzec euz a vis Eost, an devez ma pignas,
En Envou gant an Aele en solennite vras.

E teu an oll dud gant guir devosion,
Da ilis kaër Remengol da c'houlz ar pardon.

Eun Doue oll galloudec a bermet dre c'hras,
Ma ze da zul an drindet emañ ar pardon bras,
Ar bobl eus a Vreiz-Izel a veler, an deiz-ze,
O tonet da Remengol, da velet mam Doue.

En deiz-se e c'houezer induljançou plenier,
Ebars ilis Remengol e ty mam hor Salver,
En eur ober gant glac'har eur guir confession,
Hac o receo hon Salver dre ar gommunion.

D'a eilvet a guengolo, gouel he Nativite,
Ez eus ar memes pardon en illis santel-se,
A de peb gouel a Werc'hes a zo en pad ar bloa,
E teu an oll dud devot d'he bisita gant joa.

Er solennite santel eus ar Sul an Drindet,
Kemen a ya da pardon a zo oll ravisset,
E consideri Jesus ebars er sacramant
O c'hortoz hor c'halonnou gant karante ardant.

Deut ol eta christenien deut oll a vandennou,
Da Remengol da bedi mam Jesus hon Aotrou,
Assuret oc'h da veza gant Doue pardonnet,
Ma bec'h guir servicherien d'ar Werc'hes biniguet.

Renoncet d'ho pec'hejou hac en em arollet,
Ebars e breuriezou a zo instituet,
Da enori ar Werc'hes evel ar Rosera,
A rent d'hor Mam souveren eun enor ar c'haëra.

Ne vanquet quet da laret bemdez eur chapelet,
Lod demeure he c'hurunen, eun dizenez hanvet,
Nep a zeio d'he recita gant karantez barfet,
A vezo guir zervicher d'ar Werc'hes biniguet.

Tud leal a Vreiz-Izel, oll vignonet va bro,
C'hui, evit pere cals ar vue zo c'huerou,
Joa deoc'h var an douar, ha graç digant Doue,
Da vont c'hoas da Remengol, ar sourçen ar vue.

Pedit en ho c'hlevejou pedit en ho glac'har,
Ha pedit en oll boanniou hon deus var an douar,
Brassan santez zo er bed Guerc'hes sacr Remengol,
M'ar bezit fidel dezi, ne deot biken da goll.

Guerc'hes gloriüs Vari, pedet me o suppli,
Evit an oll dud devot a visitao ho ty ;
Chasset an droug sperejou demeus hor c'halonnou,
Ha presantet da Zoue bemdez hor pedennou.
Guerc'hes sacr a Remengol patronez Breiz Izel,
Pedit evidomp hirie a pa rekimp mervel,
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet !
Ho deus ho karet, ho kar, hac ho karet bepred !

Itron Varia Remengol mam Zantel da Zoue,
Pa vimp en heur ar maro, recevet hon ine,
Ha dre o torn biniguel kassit hi da repos,
Ha da veulin an Drindet e gloar ar barados.

PEDEN AR ROUE GRALON

D'an Itron Varia Remengol

Itron Varia Remengol,
Mirit ouzimp na zimp da goll ;
Pedit ive ho mab Jesus,
Ma vezimp gantan evurus.

Itron Varia Remengol,
C'hui eo Rouannez ar bed oll,
Bezit ho mam, hor batronez,
A ni ho meulo da james.

PEDEN

D'an Itron Varia Remengol.

Evit beza preservet eus ar c'hlevejou, hac
ispicial eus ar c'holera-morbus

*(Ar beden-ma, lavaret a galon e deus preservet eun niver bras a
dud ha sovetet cals a re all skoet gant ar c'holera, en kær
Montroulez'er bloavez 1854.*

Itron Varia Remengol, patronez Breiz-Izel, mam an oll dud affliget a
speret, a gorf hac a galon, c'hui a zouten kourach a zoudardet en creis

tan ar brezel, a c'hui a asten o torn a drue d'ar vartolodet prest gonfont er môr bras e furol, c'hui a zisken alies, e c'hras guele ar c'hlanvour paour ho c'har, evit rei dean ar yec'het hag hanvet oc'h en gwirionne *Remed ar bed-oll*. Pellait eta ouzin, Guerc'hes sacr, ar vocen gant an oll c'hlevejou dangerus, va dioualit euz ar maro subit, hac evit renta testeni d'ho madeles, e zin da Remengol d'ho meuli a d'ho trugarekaat en oc'h ilis santel. Eno n'ho c'heus biscoas refuset nicun deus ho pugate: bezit trugarezus em andret Couscoude, a bezo gret bolonte Doue ha pa zono va heur divezat Itron Varia Remengol, ho pet truez ouzin, grit din mervel en ho carante evel ar sent gallouduz, pere a beder en hr ty santel.

Evel ze bezet gret:

Itron Varia Remengol.

C'hui zo ar remed ar bed oll,

Pellait diouzimp an teir goalen,

Brezel, kernes hac ar vocen !

Illis Remengol a zo bet, aboue amzer ar roue Gralon, hanvet ilis *Remed-oll an Ilis miraculus*, abalamour d'ar miraclou bras a ra eno ar Werc'hes Vari

Dre he galloud ar c'hlanvour a bare.

Ar mud a gomz hac an den cam a vale !

Hanvet eo ive *sourcen a vue*, ar *seunteun a c'hraçou*, abalamour d'ar graçou a ra Doue en ilis d'an oll gristenien.

Nac a bec'her eus Doue dispartiet,

E Remengol a zo bet difasiet ! ! ! . . .

Illis sacr an Itron Varia Remengol, a c'hoas hanvet *Ilis ar Vretonnet*, *Ilis ar Saent hac ar Rouane* abalamour, goude ma eo confontet ker Is, ar roue Gralon a reas sevel ilis Remengol en enor d'a Werc'hes, evit trugarekaat Doue da veza soveteet dezan he vue ; mont a re alies d'he bisita, e compagnunes sant Kaourantin, kentan escop Kemper, sant Guenole, sant Guen-Æl ha cals a zent all pere a veve neuze e kouant Landevennec, hac a breseque ar fez dre ar vro.

Aboue an amzer-se, ilis Remengol a zo bet darempredet gant ar bobl a Vreiz-Izel, karguet a c'hraçou hag a induljançou ar re vrassan roet gant hon Tad santel ar Pap hac an eskibien.

Er bloas mil heis cant pemp hac enter cant. on Tad santel ar Pab Pi Nao en deus roet da ilis Remengol eun tam eus wir groas hon Salver Jesus-Christ, hag eun tam eus e gurunen spern : ar memeus Pap en eus c'hoas lakat eus a Rom da Remengol eun tam eus ar voal ar Werc'hes hac eus ar bez en pehini a voa bet sebeliet, darn eus ar relegou sant Joseph, sant Joachim, sant Ian-Badezour, Zant Zachari, Santez Anna, santez Elizabeth, an daouzec abostol, ar pevar Avieller, an doctoret bras eus an ilis, ha dre eur garante ar vrassan evit Remengol en deus c'hoas roet d'an templ santel-ze corf zant Silven, mignon ha compagnon an abctol sant Paul, ha relegou tri *chant pemp a tri ugent sant*, evit peb devez ar bloaz.

Archescop Paris en deus roet ive da ilis Remengol darn eus relegou Louis, roue Franc, santez Genovefa, patronez Paris, ha cats a re all.

Ar c'hardinalet, arc'hescon Tour, arc'hescon Bourdel, arc'hescon Lyon, arc'hescon Rouen, eskop Strasbourg, eskop Chartre, eskop Roason, eskop Sant-Brieuc, eskop an Nahvet, an autrou Joseph-Marie Graveran, eskop Kerne a Leon, maro en Kemper evel eur zant, iskibien all a Vreiz-Izel, a Franç hac eus ar vroïou all, ho deus roet da ilis Remengol, evel pre-sanchou ar c'haera, relegou eon niver bras a sænt, pere da bep pardon, a ve douguet e procession gant ar belerinet.

Kement zant a ouffo ann den da bedi en he boaniou var an douar, a zo darn euz e relegou en ilis miraculuz-ze, ken karet gant ar roue Gralon ; gouelet a reren oouspen relegou ar Verc'hez Santez-Anna, st Joseph, an Ebestel, etc., relegou st Augustin, st Ambrois, st Jerom, st Ian-Christostom, st Bernard, st Laurens, st Sebastien, st Rœc, st Dominic, st Kerouantin, st Paul a Leon, st Guenole, st Even, etc., relegou santes Barba, santes Mac'harit, santes Katel, santes Marie-Madeien, santes Phillo-men, ag eun niver bras a re all, *ouspen trisek cant* pere a zo eno evel eur pobl a zent dirac an Itron Varia Remengol oc'h he fedi da skuilla he graçou var ar belerinet, deut deis ar bevar avel da veuli en ilis sacr Remengol. Rouanez ar Sænt, an Ales advocades an anaoun, Patronez an dud paour, Esperans an oll gristennien, ha Mam ar Vretounet.

Ha brema, ma breudeur demp holl,
Demp da bardon bras Remengol,
Demp da ilis ar Vretonnet,
Demp da sourcen an oll remed !

Da bardon bras, pehini a bad pemp devez, var an henchou a ve goele a belerinet, darn bet clan gant clevejou danjeraus, darn all distro divar ar mör pe eus a brezel, pers a c'ha diarc'hen hac en corf o rochedou goa-dec : oll en em strinkont d'an daoulin ractal ma velont tour an ilis santel, alies en em gav ive en ho zoues, eur c'hoarek yaouank bennag, deut evit uguen gouec'h hac en eur vouela gant laounedigéz ha lavar :

« Salut, douar burzudus var bini peb kamad,

« A laka daelou a joa da zont em daoulagad

« Salud, ilis Remengol, a gaera zo er bed.

« Salud, va fatronez vad, Mam guer a Vretonned ! »

En he gever, ive eur barz, eur pelerin koz, bed alies e pardonniou Re-mengol, ha deut c'hoas eur veac'h var bouez e vaz, da c'houlen eur maro mad a zistro laouen d'ar gar en eur gana meulodi he batronez, chilaouet eo bed e beden, hac an Itron Varia Remengol er deus assuret silvidiguez d'e ine er barados Doue, ha repos d'he eskerna beteg deis ar varn, e douar beniguet, bered he barous. — Couscoude pelaat a ra gant anken.

Harp ar ra aliez var e vaz, ha teural a ra c'hoas eur zel a drugare var zu ilis he Vam karantezus pa ne vel mui nemet bec an tour, a koue d'an daoulin, hac e lavar daëlou en he zaoulagad :

« Kenavo 'la Remengol, kenavo da viken.

« Kenavo Guere'hes Vari, c'hui pini a garan.

« Kenavo pelerinet, kenavo tud va bro.

« Kenavo er Barados, kenavo, kenavo ! ! !... »

INDULJANCOU REMENGOL

Dre eur scrif apostolik, roet en Rom, en ilis Sant-Per, d'ar hemzet a vis evoen 1855, hom tad santel ar Pab Pie Nao en deus accordec en e vadelez eun induljanç plenier a remission eus ho holl fec'hejou d'ar gristenien pere. goude beza conveset ha communiet, a visito, gant devotion, ilis sacr an Itron Varia Remengol, eun induljanç a seiz vloa ha ken alies a zaounguent devez d'an oll peleriniet, ken alies goueach ma visiton gant devotion ilis Remengol, ha ma pedit eno Doue hac an Itron Varia Remed-oll.

An induljançou ma a all besa gounezet evit an anaoun.

Dre eur scrif all roet ive e Rom, en ilis Sant-Per d'an dec a vis guenveur 1865 (scrif pehini a zo bremañ expaset en ilis Remengol var eun dolen aour, e c'hars treid ar Werc'hes, hon tad santel ar Pab en deus c'hoas roet da ilis an Itron Varia Remengol an oll graçou, induljançou, ha privilegejou, accordet gant ar Pabet d'an Itron Varia Loretta, en Italie. En ilis-ze e conservet an ty en pehini a chome ar Werc'hes Vari en Nazareth hac en pini eo bet consevet hac en deus bevet hon Salver J.-C

Er blaves 1295, an Aëles a zougas a dreus an noabl, an ty santel eus a Nazareth d'an andret hirie Loretta tost da Rom savet a so bet eno eun ilis kaër, pehini a zo bet aboue darempredet bras a karguet a c'hraçou gant ar Pabet.

Neus er bed universel nemet an ilis-se, ilis Lorretta, hac ilis an Itron Varia Remengol, da here a ve bet roet graçau ken bras, ken caër. Ar gristenien a visito breman hac en amzer da zont ilis Remengol, ker brudet dre e miraciou a c'hounézo ar memes induljançou hac ar memes graçou evel a re a ia da Jerusalem, da Rom pe da ilis Loretta, da visita be hon Zalver J.-C., beion an ebestel ha ty ar Werc'hes Vari.

Dre eu scrir fall roet en Rom, en ilis Sant-Per, hom Tad santel en deus carguet, escop Kemper da guruni *evithan hac en e ano* an Itron Varia Remengol; pehini so bei kurunet, devez ar pardon bras, an 30 a vis mae 1858.

Mado spirituel ken precius a zo eun testeni eus a zevotion hon Tad santel ar Pap en andret an itron Varia Remengol hac eur merk eus e garante evit ar Vretonnet, pere a gavo bepret enn ilis sacr Remengol remed en ho foanio var an douar, pardon d'ho fec'hejou, silvidiguez d'ho ine ha delivrans d'an anaon.

MEDALEN AN ITRON VARIA REMED-OLL

Medalen an Itron Varia Remengol, *binnihuet hac induljanciet* en ilis sacr Remengol dre urs hom tad santel ar Pab a ro d'an den fisianç en Doue, nerz a enep an droug speret, chang a bonheur var ar mor, er brezel, en trubuilhou ar bed, consolation na remed en oll boaniou hon deus var an douar. Peb kristen a gle, en pad e vue, douguen gant respect en he guerc'hen, medalen precius an itron Varia Remed-oll, hac en eur vervel hen lakat var he galon evit mont dirac Doue.

Lannion, librairie Mlle DUCHEMIN